

BELEG DA VIKEN



WAR DON: Elez eus ar Baradoz,
PE DON: Kelven

I

Eus an Arvor, ar menez, diredet gant dudi,
Kanomp hirio da Zoue, kanomp e veuleudi,
Eun deiz kaer evel heman, deiz eun ofer'nn nevez
A zo eun deiz a vennoz paret war eur barrez.

Diskan

Bennoz, bennoz 'd'eoc'h Jezuz, ha mil gwech trugarez
Evid an enor dispar ho peus graet d'hor parrez
O tont enni da zibab hag enni da c'helver
Unan eus he bugale da vont ouz hoc'h aoter.

II

Evid ober eur beleg, — Doue d'ar vadiziant
Ar verk gand e zourn santel ar bugel zo d'e c'hoant;
Ha dre ma kresk en oad, e skiant, e furnez
Aked Doue warnezan a gresk ivez bemdez.

III

Evid ober eur beleg, — Doue d'ar bugelig
A laka eur vamm gristen e tal e gavelig,
Eur vamm a oar luskellat ervat he bugale
E karantez ar Werc'hez, e karantez Doue.

IV

Evid ober eur beleg, — Doue gant plijadur,
Abred a ro da glevet e c'halv d'ar c'hrouadur;
Hag ar bugel dibabet, sentus ouz mouez Doue,
A lavar a greiz kalon : « D'eoc'h oun korf hag ene. »

V

Neuze, tennet eus ar bed, eo laket er sioulder
Hag ar bedenn, ar studi, pell a vez e breder...
Eun deiz, deiz a levenez, e weler war e benn
Dourn an Eskop astennet... Beleg eo da viken !

VI

Skuilhit Jezuz, ho pennoz war ho peleg yaouank;
Laoskit warnan ho krasou da redek puih ha stank...
Ar beleg eo ho kannad, mignon hon eneou,
Ho peus karget d'hon hentcha beteg porz an nenvou.

VII

Ar beleg en e zorn sakr a zoug alc'houez an nenv.
Gand e gomz, hon ene klanv a deu nerzus ha krenv.
O burzud dreist pep burzud ! d'e gomz Jezuz zoken
Eus uhelder an nenvou, davedan a ziskenn.

VIII

Ya ! Jezuz, krouer pep tra, Jezuz, prener ar bed,
Jezuz gwir Vab an Hini, n'eus warnan mestr ebet,
Ouz komz nerzus ar beleg bemdez a zo sentus
Hag a ziskenn eus e lez war e c'her burzudus.

IX

Santez Mari, mamm Doue, rouanez Breiz-Izel,
Roit d'hor beleg yaouank, ho pennoz, ho skoazell.
E garg a zo dem-henvel, Gwerc'hez ouz hoc'h hini.
Grit ma kendalc'ho bemdez da zantelât enni.

X

Ha c'houi, sant Paol benniget, eus barr skedus an nenv (1)
Harpit ho peleg yaouank, ho prec'h d'eoc'h c'houi zo krenv,
Ma c'hello war ho roudou pell warnezo kerzet,
Ha skuih sklerijenn ar feiz ho peus d'eomp digaset.

Y. V. Perrot.

Sant Korantin benniget, eus barr skedus an nenv.

-1- Pe mar deo ar beleg yaouank eus ar vro Gerne :

Gwelet ha kavet mat evit beza moulet a nevez.

Kemper d'an 12 a viz Mezeven 1921.

P. MESSAGER.

V. V.

Moullerez Caouissin Pleyber-Christ.